

zuilh etre ho taouarn : kelenn a raint deoc'h da gentañ teurel e-vezh kaer. Dever ar c'hristen a zo implijout ar muiañ ma c'hall, an tuioù an dousañ, klask da gentañ en em servijout eus al lezennoù ha gwelout hag-eñ n'eo ket awalc'h ober ganto evit dont a-benn. An droug a zo bepred an droug, hag ober gentañ hep ezhomm ret a zo en un doare bennak, koll ar gwir d'en em sevel a-enep an droug hag an direizh a c'houzañver. Met mar chom ar gwasker aheurtet en e youl fall, kaer 'zo d'ober ha lavarout, neuze e c'hell ivez an hini gwas- ket mont pelloc'h-pellañ, rak ar gwir kentañ eo hini ar frankiz, hi- ni ar bersonelezh hag ar spered, n'eo ket hini ar mac'homerezh; n'eo ket an droug en divije gwir, zoken pa vez graet anezhañ an urzh vat, pe an urzh stabil, gant mevelien ar Stad gwasker.

Mont a ra ar gwir d'ar Frankiz betek aotren implij an armoù pa n'eus ket tu d'ober a-hend-all, nemet e tle gouzout an hini a ra gant ar c'hleze, e c'hell eñ ivez bezañ skoet en hevelep doare.

Seurt gwirionezioù a rank bezañ adlavaret ur wech an amzer, ken techet maz eo an dud a vremañ da c'houzañv n'eus forzh petra hep enebañ. Met talvoudusoc'h eo c'hoazh evidomp lenn diskleriadurioù diwar-benn ar gudenn-mañ dindan sinadur ar Pab Pi XII e-unan, evel m'en deus graet en e Gemennadur evit Gouel Nedeleg diwezhañ. War-du Bro-Hungaria en em droe sur mat e soñj, war-du an dud-se o klask en em zieubiñ eus ar Sovieded, en doan hag en anken, e-pad ma sell ar bed en em gred dieub, gant laoskentez ha lez-ober.

"Sklaer eo, eme ar Pab, e c'hell ur vro, en degouezhioù a-vremañ, en em gaout e seurt doare maz eo just eviti ober brezel-emzifenn gant ma vo esper a zibenn-mat a-enep un argad direizh, p'eo bet im- plijet en aner pep tra evit mirout na savfe seurt brezel".

Pa'm eus lennet se eo aet va spered n'eo ket hepken war-du Hunga- riz, met ivez etrezek an Iwerzhonidi a stourm a-enep Bro-Saoz, tud an Irish Republikan Army (Arme republikan Iwerzhon). Ober a reont evel a ouzoc'h, argadegoù a-enep palised ar Saozon war zouar an Uls- ter, hag i dianzavet gant gouarnamant Republik Iwerzhon, gant an diskibien a zo aet zoken betek kondaoniñ anezho. Moarvat n'emaon ket en Iwerzhon, ha diaes eo din barn. Goulenn a ran pardon digant va breudeur iwerzhonat mar skoan a-dreuz. Met da varn diouzh an diavaez evel ma ran, ne weler ket perak n'o defe ket ar baotred-se ar gwir da vont war raok evit unander o bro : hag-eñ n'o deus ket Iwerzhoniz implijet en aner betek-henn an Diplomategezh hag an Emzivizoù gant gouarnamant Bro-Saoz ? N'eo ket souezhus e vefe hiniennoù skuizh o c'hortoz. N'eo ket ken aes se gouzout betek pegoulz ha pelec'h e c'heller chom hep ober petra nemet klemm : da vihanañ, araok kondaoniñ ar re all eo ret bezañ sur n'eus nemet un hent mat, an hini a rit gentañ. Met war dachenn ar politikerezh eo diaes bras kaout ur seurt anadurezh.

Reizhder ar c'hoant d'ar Frankiz ! Eus un tu all e teu dimp kom- zoù sklerijennus. En ul lizher pastorel skrivet da fideled e eskopti (175.000 anezho) ne guzh ket an so. Klaoda Rolland, eskob Antsira- be (Madagaskar) gwirioù an dud du (hag ar re all moarvat war un dro) da vont war-du ar Frankiz : " Ar gwir hoc'h eus, emezañ, hag an dever zoken, da garout ho pro, da choentaat he frankiz. Enskrivet eo ar gwir hag an dever-se e kalon pep den, ha n'eus hini ebet a c'hellfe hen nac'hañ deoc'h... Evel ma ra ar gwir naturel, an Iliz a ziskler o deus ar pobloù ar gwir d'en em ren en o frankiz. Anzav a reomp eta da echuiñ, eo reizh ar c'hoant d'ar frankiz, evel ivez eo reizh pep striv evit tizhout anezhi... N'it ket eta da gondaoniñ ar

re a ziskler mennadoù a seurt-se, tud o deus gouzañvet poan a-wechoù en o ene hag en o c'horf en abeg da se hepken ".

Plijout a rafe din bezañ du hag e kroc'hen ur morian evit klevout komzoù ken frealzus kaset war-eeun din-me va-unan. Met ned omp nemet e Breizh, hag amañ c'hoantaat ar frankiz a zo ur fazi...

AR PEVAR PROFED BIHAN : HABAKOUK, HOB DIA, YOEL, YONA

Nep en deus lennet romantig ken koant R. Hemon, Alanig an tri roue, a oar ez eus 12 profed bihan : n'int na breudeur, na mibien Noemi, evel ma ijin Alanig. Petra int e gwirionez, me bari n'ouzoc'h ket. Gant levr diwezhañ-embannet hor Bibl brezhonek hoc'h eus tro d'ober anaoudegezh gant pevar anezho.

Ar Brofeded vihan a zo skridoù berr, ha setu hepken ar perak eus an ano-se a Brofeded vihan laket warno, rak n'eo ket o zalvoudegezh disteroc'h a se, na moanoc'h ar blijadur a zegasont d'al lenner. Peurliesañ ez int skridoù dispar e-keñver lennegezh, hag ur wech kustumet outo ez int e-touez ar re a zistroer dezho an aese-tañ, a galon laouen.

Pep unan en deus e stumm hag e gentel. Habakouk, gant e Glemm-ganoù hag e Vallozhioù, a ziskouez un doare berr ha taer da lavarout e soñjoù : un ene entanet ez eo, unan ha n'hell ket gouzañv dindan e zaoulagad taolenn ar gwall hag an direizh, unan hag en devoa dija sec'hed ha naon eus ar justis.

Hob dia a zo anezhañ daou varzhoneg gwevn ha sonerezhel : trec'h Yaweh a-enep ar Baganiezh, aroueziet gant Edom, eo an hini a vo kavet amañ. N'eo ket an droug a drec'ho erfin : digar e vo Doue e-keñver an dud digar, " Hag ar Rouantelezh a vo da Yaweh ".

Anavezetoc'h eo ano Yoel, ha pa né vefe dre ma vez implijet aes e Breizh evel ano-badéz, kement ma'm eus gwelet tud a-ziavez-bro a grede dezho e oa Yoel ur sant breton. Met marteze ar Vretoned o-unan n'ouzont ket ez eo ar profed kozh a zo dindan an ano-se. Anavezetoc'h ivez en abeg d'al lennadurioù tennet anezhañ e-pad ar c'hoareiz, evel en Ofis Merc'her al Ludu. Talvezout a ra ar boan lenn ar galv-se d'ar binijenn, gant taolenn spontus aloubadeg al lamperezed, labour ur gwir varzh, ledan e faltazi, oberenn un den a bedenn uhel, leun a fiziañs e madelezh hag e pardon Doue.

Ha piw n'en deus ket klevet komz eus Yona ? Daoust d'ar skridig bezañ berr-kenañ, pevar pennad hepken, hoc'h eus lennet dija meur a dra diwar e benn. Hag e kredit anavezout anezhañ... Souezhet e viot moarvat o lenn ar rakskrid hag o welout pegen pell e oac'h diouzh kompren Yona. Petra 'zo dindan ar peder daolenn-se ? ur barabolemm semitek-kenañ, gant ijin, goaperezh, met ivez kentel damguzh, broudus; dindan neuz farserezh, skourjez.

Met netra ne dalv lenn aketus un destenn, en em gustumiñ outi betek klevout kement n'eo nemet mouslavar. Ho lezel a ran da dizhout ar blijadur-se.

Evit kaout al levrig, kas 180 lur + 30 lur mizoù-kas da gont-chek niv. 51.940 Rennes, gant ar chomlec'h-mañ : Melle St Gal de Pons, Palais de justice, Guingamp.

GOULENNIT LEVRIOU AR BIBL BREZHONEK HA GRIT BRUD ENDRO DEZHO :
Aviel Sant Mazhe (moulet) : 250 lur + 30 lur mizoù-kas
Kohelth : 80 lur + 20 lur mizoù-kas

Diskuliadur Sant Yann : 180 lur + 30 lur mizoù-kas
Aviel Sant Yann : 250 lur + 30 lur mizoù-kas
Levr ar Furnez : 180 lur + 30 lur mizoù-kas.

LEVRIOU AR BIBL BREZHONEK DISKOUZET E KEMPER

Setu amañ danvez ar skritell a zo bet e-pad eizteiz e rakstal an Itron Kemere, e Kemper, 2 straed ar Roue Gralon, gant endro dezhi troidigezhioù ar Bibl brezhonek :

" N'eus ket ul levr par d'ar Bibl dre ar bed. Troet eo bet en holl yezhoù an douar. Teir gwech eo bet embannet e brezhoneg. Amañ avat, setu kinniget deoc'h un droidigezh katolik NEVEZ, aozet diwar ar skridoù hebreek ha gresianek en ur zerc'hel kont eus ar studia-dennoù gwellañ bet savet en hon amzer.

" Ha c'hwi a fell deoc'h lenn al Levr Santel e brezhoneg ?

" Ar gwir hoc'h eus. Pep den en deus ar gwir da lenn ha da gle-vout komzoù Doue en e yezh.

" Ouzh pep den e komz Doue, hag e pep yezh.

" Ouzhoc'h e komz e brezhoneg. "

Bernozha Doue d'an Itron Kemere, ha kenkoulz da aozer ar skrid.

HON TROIDIGEZHIOU EUS AR BIBL E-KENVER AN TROIDIGEZHIOU KOZH

Goude bezañ lennet levr diwezhañ ar Bibl brezhonek, R. Hemon a skriv dimp : " An notennoù a zo talvoudus-bras evit kompren gwelloc'h ar skrid. Ur blijadur eo lenn ar skrid e-unan. Na disheñvel eo an droidigezh a-wechoù diouzh an hini a gaver er Bibl saoznek hag er Bibl kembraek ! "

Plijout a rafe din displegañ deoc'h ar perak eus kement-se.

An troidigezhioù kozh eus ar Bibl en hor yezhoù europek a zo bet diazezet peurliesañ evit an Testamant kozh, pe war troidigezh latin Sant Jerom, ar Vulgata, a zo fazioù e-leizh enni e-keñver an hebreeg, pe war droidigezh c'hresianek an LXX; met houmañ, eviti da vezañ mat-awalc'h, a zo techet da vezañ laosk, ha dreist-holl n'eo ket harpet war dornskridoù hebreek difazi.

Ar studioù diwezhañ war an Testamant kozh a zo bet da gentañ holl enklask an dornskridoù hebreek gwellañ, ha studi resis an destenn. War un dro eo deuet an hebreeg e-unan da vezañ ur yezh gwelloc'h a-navezet, ken yezhadur, ken geriadur. Evelse ez eus bet gallet rei-zhañ gwerzadoù pe frazennoù a oa chomet betek-henn digomprenus pe dost. Kemmañ un nebeut lizherennoù en ul linenn hebreek a zo awalc'h evit reiñ dezhi ur ster disheñvel a-grenn, a-wechoù ul lizherenn en ur ger.

Daoust da se e rankomp anzav ez eus skridoù a zo deuet betek en-nomp en ur stad fall awalc'h : Habakouk da skouer. Petra 'zo da lenn? An dra-mañ pe an dra-se? Penaos kompren ? N'ouzomp ket kaer a-wechoù. He neuze ez a pep biblour un tammig diouzh e soñj evit treiñ an destenn diouzh e wellañ. Kement gwech m'eo c'hoarvezet an dra-se gannimp, ha zoken pa chome diasur an destenn hec'h-unan, hon eus hen notet e traoñ ar bajenn. Sellit da skouer ouzh Habakouk 1, 9; 1, 11, hag all.

Ouzhpenn-se eo ret lavarout ez eo an Hebreeg ur yezh diaes, ha pell-bras e stumm diouzh hor yezhoù europek. Doareoù ar Verb hebreek n'o deus netra da welout gant hor re; an araogennoù hag ar stagelloù a zo nebeut anezho, ha laosk awalc'h. Kentoc'h eo lusk ar frazenn hag ar soñj, arlivioù ar verb e-unan a ziskouez ar ster re-

sis. Ha pep nnan a ra eus e wellañ evit treiñ en un doare reizh ha bev war un dro.

Ne c'hell un droidigezh nemet bezañ ur striv da dostaat ar muiañ a c'heller, da binvidigezh ar vammskridenn : arabat krediñ e tizh-fe bezañ kement hag houmañ. Evit an Testamant nevez, ar yezh kentañ o vezañ ar gresianeg, ne chomer ket re bell. Evit an Testamant kozh avat eo un afer all.

M.G.

HON ANAON

Pedomp evit ar re a zo aet diouzhimp war-du an Tad :

An ao. Galbrun, pried an Itron Galbrun, a zo bet bepred ken emouestlet da gaoz ar Vro. An Itron Galbrun da resevo hor c'halonekañ gourc'hemennoù a gengañv.

An ao. Gourlaouen, Tad Marc'harid Gourlaouen. Holl dud an emsav a anav penaos he deus en em roet Marc'harid da oberenn ar Skol dre Lizher, he deus graet kement a vad d'ar brezhoneg.

Pedomp ivez evit Dyfnallt Owen, ar pastor protestant ha rener kazetenn gembraek Y Tyst, mignon bras d'an aotrou Perrot : kalz a anaoudegezh vat a dleomp dezhañ evit ar sikour en deus roet d'ar Vretoned en amzer trubuilhus ar bloavezhioù 1945, evit hon difenn a-enep heskinerezh gouarnamant Paris.

Aotrou, roit dezho an diskuizh peurbadus,
Ho sklerijenn hep fin da lugerno warno.

PRIZ LENNEGEL AN EMGLEV KULTUREL

Trugarekaat a ran a galon an Emglev Kulturel evit ar priz en deus bet ar vadelezh da reiñ din, evit va oberoù brezhonek diwezhañ : Komzoù bev ha troidigezhioù ar Bibl. Kalz frealz am eus bet o welout va c'henvroiz o prizout ivez ar striv-se a zo ar Bibl Brezhonek, hon eus bet ken c'hoant a bell 'zo da gas da benn. Met o lod eus ar veuleudi a dlean rentañ d'ar re o deus kenlabouret ganin hag a zalc'h d'hen ober gant kement a ampartiz : an ao. Klerg da gentañ holl.

Trugarez ivez d'an Emglev evit ar 5.000 lur roet d'ar Bedenn evit ar Vro. Spi hon eus e respontimp gwelloc'h gwellañ d'ar pezh a c'hortozit diganimp.

M.G.

PEC'HERINAJ EN ENVOR AR RE VARO EVIT BREIZH

D'al lun Fask kentañ, 22 a viz ebrel, e vo aozet gant Unvaniezh Koat Keo, ur pec'herinaj bras en eñvor ar re varo evit ar Vro. An dud o tont eus pevar c'horn Breizh, hag o tremen en o beaj war beziou tud o c'hontre maro evit ar Vro, en em gavo da greisteiz war beziou ar vreudeur Bocher e Sant Servez. War dro 2 eur 1/2 e vint e Bolazeg war vez Filipon, evit degouezout e Koatkeo, Skrignag, da 3 eur goude kreisteiz.

C'hwi hag a c'hello kemer perzh er pec'herinaj, grit anezhañ ur gwir bedenn evit hor re varo, hag en o soñj, un azgoulenn war-du an Aotrou evit silvidigezh Breizh korf hag ene.

Ha mar n'hellit ket dont, pedit a-gevret, kerent ha bugale, evit hor re varo hag evit ar Vro, ha grit eus an devezh-se, an devezh eñvoriñ.

Ar bedenn a zo ur sin a gumuniezh, un ere etre an amzer dremenet hag an da-zont.

MARO DIR-NA-DOR

N'hon eus ket leñvet d'ar barzh kozh, en gwirionez, evidomp da vezañ anavezet ha karet anezhañ, ken sur ma oamp en devoa kavet " e deun ar foz

Toull hent skedus ar Baradoz " (1)

Abaoe keit all ma oa e zaoulagad kloz troet hepken war-du ar sklerijenn beurbad ! Abaoe keit all ma oa e galon - deut da vezañ " ur vered ha hi leun a vezioù " (2) - dedennet gant " kerent, mignoned, kenvroiz aet e-biou " (2) a vouskane dezhañ :

" Deus eta, da blas a zo graet
Betek pegeit 'vi gortozet,
Gouzout a rez, deut eo da dro
Da zont davet ar re varo " (1)

Tregont vloaz 'zo hor boa graet anaoudegezh gantañ : un denig hegarat meurbet ha bev-buhezek d'ar mare-se. Gwelet hon eus an nerzh o vont kuit dioutañ tamm ha tamm, nemet e chomas start ha divoulc'h e feiz en dazont ar Vro hag e garantez eviti. Ne oa ket torret Dir-na-dor, met brevet e oa e galon gant poanioù ha kañvoù e-leizh. Brevet e gorf hag e spered gant re-labour ha kerse.

En Emzav breizhat, eñ n'en deus klasket morse - evel ma ra hi-niennoù - tennañ dezhañ brud hag enorioù. N'en deus ket sonet an drompilh, na huchet dirak ar mikro evit reiñ da c'houzout e oa gouestlet e vuhez da Vreizh ha d'ar brezhoneg. Hogen he roet en deus e gwirionez, takenn ha takenn, e kreiz ar baourentez hag a bep seurt skoïlhoù.

E skouer veur a chomo dimp, tud klouar ha lezirek maz omp, d'hon broudañ ha d'hon frealziñ. Estreget pediñ evitañ a zo d'ober: heuilhañ e roudoù a zo bepred aet war eeun.

B.

(1) Ar Maen diwezhañ. (2) Pedenn an Dilerc'hiad. (Al Liamm, niv. 52, Gwengolo-here 1955).

MEULGAN AR C'HOAREIZ

Ni hoc'h asped, krouer ar bed, En amzer-vezh mañ da gl'evet
Pedenn ha Kery hon ene. - ou' A bis fomp deoñ gant hon yunoi

C'hwi a wel hon breskadurezh - Hag holl bec'hedoù hon buhez,
Met roit dimp gras ho pardon - Pa zistroomp deoc'h a galon.

Klask a reomp gwir binijenn - Dre aluzon, yun ha pedenn,
Evit ma ch'ellimp ho meuliñ - Pareit ennomp pep gouli.

Hon c'hoantegezh a gastizomp - Ho kras nerzhus a c'houlennomp
Ma yuno ivez hon spered - Diouzh banvez hudur ar pec'hed.

Ni hoc'h asped, o Treinded sakr, - Ni a gement a zo fallakr,
Da reiñ d'hon eneoù direizh - Adsav ha nerzh dre ar C'hoareiz.

Amen.

Pep gwir miret strizh

Kaer 'zo d'an Tad santel ar Pab klask dihuniñ ar Gatoliked d'ar vuhez personel ha gervel anezho d'ar striv evit trec'h ar spered, ne vez ket selaouet. Ha koulskoude en em lezel da vezañ robodoù hep istor, hep hengoun, a zo nac'h ar Gristeniezh. En e gemennadur d'ar bed da zeiz Nedeleg diwezhañ e lavare c'hoazh : " Mat eo klask gwellaat frammadur ar Gevredigezh a-vremañ, met ur fazi a vije tennañ an den ermaez eus e hengounioù, dre zigarez a reizhadur teknikel ha modern. Evel plantenoù diskrapet diouzh o douar ha degaset en un temz-amzer diaes evito, en em gavfe an dud-se o-unan-penn, en un doare krizh, evit kouezhañ dindan yeo menozioù ne c'hell den ebet a-benn ar fin karout anezho ". Ha komz a ra Pi XII eus ar resped dleet d'an amzer drement ha da deñzorioù an Istor.

+

Kaer 'zo dezhañ lavarout : al lodenn vrasañ ac'hanomp, beleien zoken, n'o deus nemet un aon, bezañ war lerc'h. Ha bezañ war lerc'h, evit an dud a-vremañ, eo bezañ gwriziennet er vro, anavezout hon istor, komz brezhoneg hag ober gantañ evit pep tra. Bezañ war raok eo ober gant ar mekanikoù, lakaat pladennoù da seniñ en Iliz zoken e-pad an ofisoù, pe ober gant ur magnetofon evit kanaouennoù an oferenn peogwir e chom mut an dud. N'eo ket farserezh a lavaran. Evit an interamantoù da vihanañ eo bet implijet evelse ar pezh a zo bet anvet gant goab beleien all " Ar Sakrist elektrik ". Gouzout a ran ez eus oris-taled e-touez ar veleien. Met 'velkent ! Kouezhet omp izel. Pa welan e rank seurt stultennoù bezañ difennet groñs evit ma vefe paouezet ganto. Peseurt relijion eo an dra-se ? Pelec'h emañ ar spered, ar galon, an emdro da Zoue, an emro a youl a zo ar bedenn wirion, ar veuleudi dleet d'an Aotrou ? An oferenn n'eo na trouz, nag hucherezh, na zoken sonerezh, met sakrifis hor Salver profet gant ar beleg hag e dud, a spered hag a galon... Ur magneto ouzh troad ar Groaz ? Ur magneto da respont da gan an Aeled ?... Ret eo bezañ kollet ar skiant eus ar pezh a zo sakr.

Met gwir eo, ne vez ket santet ken petra eo d'un dra bezañ sakr. Hen gwelout a reomp bemdez, ni personed parrez, gant ar paperoù a resevomp. Ur bern paperoù ! Met kentelius lenn anezho. Setu ur prospektus oc'h ober embann evit levrioù ha filmoù diwar-benn sant Dominik Savio : " Un gosse du tonnerre... " Un all evit pladennoù hag aotenoù a ziskouez an talbenn-mañ e lizherennoù bras : " Radio-Pygmalion, Disques religieux, rasoirs électriques ". Hep kontañ an euzhusterioù a vez kinniget evel arrebeuri Iliz, gwiskamantoù-liderezh: furmioù kleuz, boutin ha divalav.

En em santout a reer evel flastret dindan pouez ar sevenadur danvezel ha dispered-se, kement ha kement ma ne weler ket penaos e c'hellimp trec'hiñ warnañ nemet e teufe brec'h nerzhus Doue da cheñch tu d'an traou.

Deuit ennomp, Spered Santel !

M.G.

DISKOUEZADEG AR BIBL

An Tadoù Dominikan o deus graet tro eskoptioù Bro-C'hall gant un diskouezadeg aozet-kaer diwar-benn ar Bibl. Goude Sant Brieg ez int tremenet dre Gemper. Eno o deus kavet war o hent an Itron Kemere he deus roet dezho hon troidigezhioù brezhonek eus ar Bibl. Diskouezet

Ar Bedenn evit ar Vro. Follenn 39

int bet eta en Iliz Veur Sant Kaourantin, hag hiviziken e vint stali-
et, e-touez levrioù ha troidigezhioù all, e kement lec'h ma tremeno
Diskouezadeg ar Bibl.

Ar pezh a vank dimp a-wechoù eo goulenn.

Trugarez d'an Itron Kemere, en ano Breizh hag an Unvaniezh speredel

HON ANAON

D'ar 24 a viz meurzh 1957 e varve an Tad Josef Duchauchix, da 75
vloaz, goude 36 vloaz a vuhez relijiel en abati Hautecombe. N'oar ket
sur mat al lodenn vrasañ eus hon lennerien, eo bet an tad Duchauchix
e-touez paotred kentañ Breiz Atao, goude ar brezel 1914, hag evitañ
da vezañ aet da vanac'h goude-se, e oa chomet an Tad Josef broadelour
dispont ha kalonek. Koumanatet e oa da gement kelaouenn a-bouez a oa
e Breizh : ha setu perak, hervez ma skrive dimp, e c'heller kaout en
abati Hautecombe, dastumadegoù klok eus Breiz Atao, eus Gwalarn, ur
gaer a levraoueg vreizhek. Dindan sinadur Ronan Kermene, en deus roet
e Gwalarn, adalek an niv. 18, un adstummadur brezhonek eus Danevell
varzhus Sant Brendan ar merdead. Echu gantañ e Imram, ra vo resevet
bremañ gant an aotroù Doue e porzh ar Baradoz, ha ra bedo evit ar vro
en deus karet kement, evel ma pedimp evit levenez e ene. Ur pennad
hir ha mat-kenañ a zo bet embannet diwar e benn er gazetenn ArVro,
niv. 23 - gouere.

An eo. Pichavant, maro d'an 28 a viz genver, e Pont Ste Maxence,
Oise.

BADEZIANTOU

E ti Divi Kenan Kongar hag Ivetig an Dret eo bet ganet d'an 21 a
viz c'hwevrer ur paotrig a zo bet anvet Divi.

E ti Alan al Louarn ha Noela Olier, ur plac'hig anvet Katell, d'ar
sul 3 a viz c'hwevrer.

E ti ar c'habiten Souffes-Despres, diw blac'hig, Hervalina ha Sa-
bina.

An Aotroù Doue da roio dezho kreskiñ en e furnezh hag en e garan-
tez.

MIRIT MAT FOLLENOU AR BEDENN EVIT AR VRO

E traoñ pajenn gentañ ar follenn 19 hor boa skrivet : "Mirit gant
evezh ar follennoù-mañ. Klask a vo warno a-benn dek vloaz ". Met un
amzer re hir hor boa merket deoc'h. Klask a zo warno dija. Abaoe ur
pennad ez eus meur a hini en deus goulennet diganimp follennoù a van-
ke dezho, bet dianket. Gallet hon eus klokaat o dastumadegoù betek-
henn. Met meur a follenn ne chom ken ganimp nemet nebeut a skoueren-
noù diouto, ha reoù all a zo diviet naet. Mirit eta gant evezh ar
follennoù a resevit : renkit anezho goude o lenn en ur golo bristol.

UN ABATI NEVEZ EN IWERZHON

Prioldi beneadat Glenstal, krouet en Iwerzhon gant Dom Kolomba Mar-
mion, tregont vloaz 'zo, a zo bet savet da Abati, dindan an ano a
abati Sent Joseb ha Kolomba, gant al lizher abostolek " Insula Sancto-
torum " (Enez ar Sent), genver 1957.

Da abad kentañ eo bet dibabet Dom Joseb Dowdall, un iwerzhonat

yaouank, bet ganet e Millingar e 1927.

Ur blijadur vras eo evidomp kas hor salud keltiek d'an Abad ha d'an Abati nevez, a raio sur mat kalz a vad en Iwerzhon, lec'h ma veze gwechall un niver ken bras a venec'h.

KEMBRE O TREIN WAR-DU AR GATOLIGIEZH ?

An ao. beleg Stanley Vince, person e Llandoverly (Kembre) a zo bet dibabet da vaer a unvouezh. Ar beleg katolik kentañ an hini eo o vezañ anvet da vaer abaoe ar Reform. An ao. Vince a oa kuzulier abaoe warlene ha ne oa e Llandoverly kuzulier katolik ebet estregetañ.

TROIDIGEZH AR BIBL EN JILBERTEG

Troet eo bet ar Bibl en o yezh evit tud an inizi Jilbert (16000 a gatoliked war 36000 a dud). 3.000 skouerenn a zo bet moulet e-velse en Jilberteg... Ha ni e Breizh, evit kant gwech muioc'h a dud, e vez moulet dek gwech nebeutoc'h, ha c'hoazh n'hellomp hen ober nemet dre liesskrivañ tamm ha tamm.

Prenit hep mui dale levrenn diwezhañ ar Bibl brezhonek : Ar pevar profed bihan , Habakouk, Hobdia, Yoel, Yona. 180 lur al levrig ha 30 lur a vizoù-kas da gont-chek 51.940 Rennes, gant ar chomlec'h mañ : Melle St Gal de Pons, Palais de justice, Guingamp.

ESKIMOED EVURUS

War ar gelc'hgelaouenn : Pole et Tropiques, niv. ebrel 57 embanet gant an Tadoù Obladed ez eus ur pennad kentelius diwar-benn ar skolioù e bro Eskimoed ar C'hanada.

" Da gentañ, eme ar pennad, e oa kudenn ar yezh. Da yezh ar vro e tle bezañ miret al lec'h pennañ er gelennadurezh, ha ne fell ket dimp e vefe ankouaet o yezh gant an Eskimoed yaouank. Met an Eskimoeg n'en deus na lennegezh skrivet, na netra, hag ar programoù evel al levrioù-skol kaset gant ar gouarnamant a zo e saozneg... E-pad ar c'hlas eo ar saozneg a vez implijet... Met ur wech aet kuit eus ar sal-skol, ec'h adkav an eskimoeg e wirioù... E ti-lojeiz ar skol e komz al leanez-renerez eskimoeg : pedennoù, kanaouennoù, c'hoarioù ha predoù a vir ar muiañ a c'heller o stumm eskimoat. Ar gelennadurezh kristen dreist-holl a vez roet en eskimoeg hep mui ken : en doare-se en em ziforc'h houmañ diouzh al labour-skol, hag antren a ra donoc'h e personelezh hag e buhez ar vugale ".

Ar pezh a glask al leanezed du-hont eo en em reiñ d'o zud :

" En he rentañ-kont warlene e skrive al leanez-renerez : Klask a reomp a galon stummañ hon doareoù-soñjal-hag-ober diouzh re an Eskimoed ha n'eo ket ar c'hontrol ".

Hag un tammig pelloc'h e lavar c'hoazh an hevelep kelaouenn :

" Al lodenn vrasañ eus ar re wenn o tont e bro an Artek - ha niverus niverusoc'h ez int abaoe un nebeut bloavezhioù - a zegouezh amañ gant ar raksoñj-mañ en o fenn muioc'h pe nebeutoc'h, sklaer pe amsklaer : Ar sevenadurezh, ni an hini eo ! An Eskimo eo an den na gomz nemet Eskimoeg:sellet e vez alies ganto evel un den hegarat, o vouzc'hoarzhin ken aes ha tra, ur paotr a oar en em zibab, met a-benn ar fin, un den a renk izeloc'h : sonjit 'ta ! C'hwezh ar reunig a vez gantañ ha komz a ra ur yezh digomprenus.

" Lenn a raemp un nebeut mizvezhioù 'zo komzoù un etnologour en

ur rentañ-kont eus ul levr diwar-benn buhez an Eskimoed. Pezh a lavare an den skiantek a-ziwar e lennadenn a oa kement-mañ : Ne veze nemet ur soñj e penn an Eskimo, debriñ, kousket, kaout plijadur, pezh n'eo ket gwall-disheñvel diouzh ar pezh a glask ul loen. Met mar bije bet studiet gant an den gouiziek-mañ petra a ra endro dezhañ an dud a reer tud sevenet anezho, en divije gwelet marteze ne soñj ket al lodenn vrasañ anezho e traou disheñvel ... "

Setu dres ar pezh en deus graet ar brasañ droug: kredet eo bet, ha kredet e vez gant an dud e karg, skolaerien, skolerezed, hag all e tegasont ar sevenadurezh gant o doareoù estren. N'eus ket keit-se ez eus deuet en ur skolaj eus hon eskopti, ur studier eus Skol-veur Anjer, d'ober ur brezegenn en ano an obererezh katolik. Komzet en deus da vugale ar skol, bevet eo bet en ti ... Hag an deiz war lerc'h goude bezañ kousket mat, eo diskennet ar paotr yaouank er sal-debriñ evit e zijuni : komz a ra dinec'h, jestraouiñ, hag o sellout ouzh ar gelennerien a oa aze, setu-eñ da ziskleriañ ken dichek ha tra : Souezhus eo penaos ar Vretoned o deus pennoù-porc'hell (des têtes de cochon) !

Harpit Skol, an dastumadenn a gelennouriezh embannet gant an ao. Kalvez, reñer Skol Sant Erwan, Plouezeg. 6 niverenn a zo dija deuet ermaez, diwar-benn kudennoù ar gelennadurezh diwezech e Breizh hag er broioù all, diwar-benn an doare da grouiñ en dro d'ar vugale un aergelc'h breizhek. Fellout a ra dezhañ e-unan ober hervez e soñjoù, hag emañ o vont da zigeriñ e miz here ur C'hlas-henchañ a raio dreist-holl gant ar brezhoneg evel yezh diazez. Goude strivoù Kerlann e-pad ar brezel diwezhañ, eo sur mat, an taol-esa-mañ un darvoud a-bouez en hon istor.

INDONEZIA

Plijus eo bepred lenn diwar bluenn ar re all soñjoù a garer, ha gwelout o'n em ledañ dre ar bed menozioù hon eus stourmet evito aned buhez. O tigeriñ Rythmes du monde, niv. 4, 1957 (embannet gant Abati Sant Andrev, Belgia), on bet dedennet gant ur pennad diwar-benn Indonezia, pe gentoc'h ar menozioù a vez o ren bremañ el lodenn-se eus ar bed.

Displeget int en ul levr anvet ar Pantja Sila, diskleriadur menozioù filosofel ha politikel ar vro nevez, a zo anezho pemp gwirionez pennañ : feiz en Doue, doujañs d'an den, karantez-vro, demokratelezh ha surentez ar bobl.

Ger-stur ar vro eo : Unander en diskeñvelder. Evel ma servij bleunioù disheñvel d'ober braventez ur boked, evelse en em stroll sevenadurioù disheñvel en unander uhel ar vroad. Hag houmañ d'he zro a dle chom renet gant karantez Doue, pennabeg pep tra.

Ha petra bennak m'en em zigor ar vro da sevenadurezh an hollved, ne vez ket dilezet ar c'hultur broadel. Goulenn a ra ar Pantja Sila ma vo implijet teñzorioù ar sevenadurezh hollvedel evit uhelidigezh ar vro, met war un dro ma vo karet ha kresket pinvidigezh speredel Indonezia : rak n'heller ket talvezout un dra bennak er sevenadurezh hollvedel, nemet o vezañ feal da bersonelezh ar vro hec'h-unan.

Evelse ne c'hell bezañ arakadenn wirion nemet an hini en em harpfe war an amzer dremenet.

AFRIKA

Souezhus eo penaos en Afrika ivez e tro buan ar bed, en doare ma weler buan, en trevadennoù Bro-C'hall ha Bro-Saoz, kudennoù heñvel ouzh ar re a glaskomp, abaoe tregont vloaz, diskoulmañ en hor bro.

Ur C'hendalc'h hollvedel a zo bet dalc'het e Paris etre arzhourien ha skrivagnerien du. Evelse, Daniel Rops dixit, ez eus bet krogget gant ur pennad nevez eus istor Mab-den !

Pezh a zo da notañ eo o deus an holl er c'hendalc'h-se staget ouzh kudenn ar Frankiz hini ar C'hultur, al Lennegezh, an Arz. Ar c'hoant d'an emrenezh, d'an emzispjegerezh a zo anat e-touez tud desketañ ar broioù du.

Diwar-se e komprenere gwelloc'h peseurt ster a zo gant anvidigezh an ao. Gantin, sakret e Roma d'an 3 a viz c'hwevrer, da adeskob Kotonou. Daoust d'e ano seblantout bezañ gallek, ez eo an ao. Gantin ur morian, ha dre e vamm eo kar da diegezh Rouaned Abomey. Hag e-touez soñjoù pennañ an eskob nevez, ez eus krouidigezh ur greizenn gulturel en e vro hag evit e vro.

Un hevelep ster a zo gant krouidigezh manati kentañ Beneadiz du, en Tanganika, manati sant Maor e Liganga. Ur prioldi distag a zo bet graet anezhañ nevez 'zo, en ul lid bras dirak un engroez a dud. En devezh-se eo bet degemeret en ti pevar neveziañ kentañ, morianed anezho. Penn da benn eo bet implijet evit al lidoù yezh ar vro, ar c'hiswahili. Ha doareoù-bevañ ar gouent a zo diwar stumm-bevañ an dud du.

Ur wech c'hoazh evel ma skrive unan eus hol lennerien : " Me ivez a garfe bezañ du hag e kroc'hen ur morian ".

HAG EN ALJERIA ?

Petra 'zo e gor e penn eskibien Aljeria ? Hervez hiniennoù o divije soñjet goulenn digant Roma ar gwir d'ober gant ar rit melkiat hag an arabeg evel yezh a iliz, evit ma c'hellfe al lidoù bezañ tostoc'h da ene an dud.

Dinac'het eo bet o divije sellet a-dost ouzh seurt kudennoù, met anavezout a rit ar c'hrennlavar : N'eus ket moged hep tan. N'eus forzh penaos, hen gouzout a rit marteze, e vez implijet ar rit melkiat hag an arabeg gant kumuniezhoù 'zo eus Breudeur vihan Charlez de Foucault, en Aljeria; hag emañ e soñj kumuniezhoù all, monialezed zoken, ober kement all.

UR SKOUER DA HEUILH

Resevet hon eus al lizher-mañ ken frealzus :

" Kas a ran deoc'h ur follenn emouestlañ evit bezañ degemeret e-touez kenvreudeur an U.S.V. evit an derez kentañ; e gwirionez, setu aze ur bloaz dija (pe dost) ma pedan diw wech bemdez hervez reolenne kenvreudeur an Unvaniezh. Betek bremañ n'em boa ket kredet kas ur goulenn evit bezañ degemeret, ne oan ket sur da vezañ pennek awalc'h. Peogwir eo anat e talc'han abaoe mizioù ha mizioù, e kredan e c'hellin hen ober pell amzer c'hoazh, betek fin va buhez, mar 'don skoazellet gant an Aotrou Doue. Peditañ a ran evit Breizh, evit ar Vretoned (daoust d'am fedennoù bezañ dister awalc'h, me gav din). Hag en eskemm e c'houlennan digant ar re all peditañ evidon ha va ziegezh, ezhomm am eus, ezhomm bras zoken ".

PEDOMP AN EIL EVIT EGILE, PEDOMP EVIT AR VRO, MEULOMP AN AOTROU.

HON TAD HAG A ZO EN NENVOU ...

1. Hon Tad hag a zo en neñvou, Ra ga-no deoc'h an holl veñou,
Hoc'h a-no da ve-zo meulet, ka-ret dre holl ha benni-get.

2. Ra zeuy en holl grouadelezh - Urzh nevez ho Rouantelezh :
Ho polontez da vezo graet - Ganimp evel gant an Aeled.
3. Hirio reit dimp evel bemdez - Bara santel ho madelezh :
Bezit ouzhimp trugarezus - Hervez maz omp-ni pardonus.
4. N'hon lezit ket da vont nepred - Gant temptadur an drouk-spered :
Hon dilivrit da virviken - Diouzh galloud an deñvalijenn.

Pep gwir miret strizh gant M. Glanndour
Imprimatur : E. Brochen, St Brieg, 1.4.56

ASPERGES ME : SKUILHIT WARNON ...

Skuilhit warnon ho tour santel, Aotrou, ma vin glanaet ;
va gwelc'hit, va Dou-e, hag e vin gwennoc'h e-vit an
erc'h. Salm: Ho pet tru-ez ouzhin, Aotrou, hervez braster ho tru-
gareziou, hag hervez niver ho trueziou, diverkit va fallagri-ezh.
Skuilhit warnon ... Gloar d'an Tad ha d'ar Mab, ha d'ar Spered
Santel, e-vel ma oa er penn kentañ, ha bremañ, ha da viken, a



gantvejoù da gantvejoù. Amen. Skuilhit warnon ...

G/ Diskouezet dimp, Aotrou, ho trugarez

R/ Ha roit dimp ho silvidigezh.

G/ Aotrou, selaouit va fedenn

R/ Ha ra yelo va garmadenn betek ennoc'h.

G/ Ra vo Doue ganeoc'h

R/ Ha gant hoc'h ene.

Pedomp : Hon selaouit, Aotrou, Tad santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, + ha kasit eus an neñv hoc'h Ael santel ++ ma teuo da zi-wall, da zifenn ha da skoazellañ ar re holl a zo en ti-mañ. Ni ho ped dre Jezuz Krist, hon Aotrou. R/ Amen.

Pep gwir miret strizh gant A. Gwazdoue ha M. Glanndour

Imprimatur : St Brieg, 1 - 4 - 56

don ster ar c'homzoù sakr-se a denn o sklerijenn hag o nerzh eus feiz virvidik kantvedoù kentañ an Iliz.

M.G.

O R D I N A L _ A N _ O F E R E N N

+ En ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel. Amen.

Antifonenn : Antren a rin da gaout hoc'h aoter, o Doue !

R/ Doue 'zo levezet va yaouankiz.

Salm 42

Justis evidon, o Doue, ha difennit va c'haoz

A-enep ur vroad disakr :

R/ Diouzh an dud gaouiat ha fallakr
Va dieubit ha va salvit.

Rak c'hwi Doue, 'zo va difenn :

Perak am argasit,

R/ Perak e kerzhan en dristidigezh
Breset gant an enebour ?

Kasit din ho sklerijenn hag ho kwirionez,

Int-i am blegno,

R/ Int-i am reno betek ho menez santel,
Betek ho tabernakloù.

Hag antren a rin da gaout hoc'h aoter, a Doue !

Va levezet ha va drantiz.

R/ Hag ho meuliñ a rin war an delenn,
Doue, va Doue !

Perak out mantret, va ene,

Ha strafuilhet ennon ?

R/ Esper en Doue, rak e lidañ a rin c'hoazh,
Eñ va salver ha va Doue.

Klod d'an Tad ha d'ar Mab

Ha d'ar Spered Santel,

R/ Evel ma oa er penn kentañ, ha bremañ, ha da viken,
A gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Antifonenn : Antren a rin da gaout hoc'h aoter, o Doue !

R/ Doue 'zo levezet va yaouankiz.

G(werzad)/ + Hor skoazell a zo en ano an Aotrou

R(espont)/ Oberour an neñv hag an douar.

Me 'gofes ouzh Doue hollc'halloudek ...

Ra 'vo Doue trugarezus en ho keñver ha pardonet deoc'h ho pec'hedoù, ra gaso ac'hanoc'h d'ar vuhez peurbadel. R/ Amen.

Pardon hag absolvenn eus hon holl bec'hedoù da roio dimp an Doue hollc'halloudek ha trugarezus. R/ Amen !

G/ Doue, en em droit ouzhimp ha roit dimp buhez :

R/ Hag ho pobl ennoc'h en em laouenaio.

Ar Bedenn evit ar Vro. Follenn 42

G/ Diskouezit dimp, Aotrou, ho trugarez :

R/ Ha roit dimp ho silvidigezh.

G/ Aotrou, selaouit va fedenn,

R/ Ha ra yelo va garmadenn betek ennoc'h.

G/ Ra vo Doue ganeoc'h :

R/ Ha gant hoc'h ene.

Pedomp :

Ni ho ped, Aotrou, lamit kuit diouzhimp hor pec'hedoù, ma c'hel-
limp antren gant eneoù puraet e santual ar Sent. Ni ho ped dre Jezuz
Krist hon Aotrou. Amen.

Hoc'h aspediñ a reomp, Aotrou, dre veritoù ar Sent a zo amañ o re-
legoù, ha war un dro, dre hoc'h holl Sent, ma plijo deoc'h pardonñ
dimp hon holl bec'hedoù. Amen.

Lennet e vez ar c'han-antren (Introit)

Kirie eleison : Aotrou, ho pet truez ! (3 gwech)

Krist, ho pet truez ! (3 gwech)

Aotrou, ho pet truez ! (3 gwech)

Gloria : Klod da Zoue e lein an Neñvoù. Ha war an douar, peoc'h d'an
dud a volontez vat. Deoc'h-c'hwi meuleudi. Deoc'h-c'hwi bennozh ha
bennozh. Deoc'h-c'hwi azeulidigezh. Deoc'h-c'hwi klod hag enor. Deoc'h
c'hwi e rentomp hor grasoù, en abeg da veurded hoc'h ano. Aotrou Doue
Roue an neñv, Doue an Tad hollc'halloudek. Ha deoc'h, Aotrou, Mab
unganet, o Krist Jezuz. Aotrou ha Doue, dañvadig Doue, o Mab an
Tad. C'hwi a lam kuit pec'hedoù ar bed, ho pet truez ouzhimp. C'hwi
a lam kuit pec'hedoù ar bed, selaouit galv hor pedennoù. C'hwi aze-
zet a zehoù d'an Tad, ho pet truez ouzhimp. Rak c'hwi hepken a zo
santel. C'hwi hepken 'zo Roue. C'hwi hepken uhel-meurbat, o Krist
Jezuz. Gant ar Spered Santel, e klod peurbadel Doue an Tad. Amen.

Kenbedenn : G/ Ra vo Doue ganeoc'h ! R/ Ha gant hoc'h ene.

Abostol. E dibenn an Abostol e lavar ar selaouerien : Bennozh da
Zoue !

Aviel : Araok lenn an Aviel, e lavar ar beleg pe an avieler ar pe-
dennou-mañ :

Purait va c'halon ha va diweuz, Aotrou Doue hollc'halloudek, c'hwi
hag hoc'h eus puraet gant ur c'hlaouenn-dan diweuz ar Profed Isahia :
plijet ganeoc'h va glanaat ivez en ho trugarez vras, ma vin evit em-
bann evel maz eo dleet, hoc'h Aviel Santel. Ni ho ped dre Jezuz Krist
hon Aotrou. Amen.

Mar plij, Aotrou, roit din ho pennozh :

An Aotrou da vezo em c'halon (ez kalon) ha war va muzelloù (da
vuzelloù) ma vin (vi) evit embann evel maz eo dleet e Aviel San-
tel. Amen.

G/ Ra vo Doue ganeoc'h. R/ Ha gant hoc'h ene.

Kendalc'h eus an Aviel Santel hervez... R/ Klod deoc'h-c'hwi, Ao-
trou !

E fin al lennadenn e vez lavaret gant ar selaouerien : Meuleudi
deoc'h, o Krist !

Kredo : Ni a gred en un Doue, an Tad hollc'halloudek, en deus graet an neñv hag an douar, kement a weler ha kement na weler ket. Hag en un Aotrou, Jezuz Krist, Mab unanel Doue. Eñ ganet eus an Tad arack an holl gantvedoù, Doue eus Doue, Sklerijenn eus Sklerijenn, Doue gwirion eus Doue gwirion. N'eo ket bet graet, met ganet, ha kennatur eo gant e Dad, ha drezañ eo bet graet pep tra. Evidomp-ni an dud hag evit hon silvidigezh eo diskennet eus an neñv. Ha kemeret en deus korf dre nerzh ar Spered Santel eus ar Werc'hez Vari, ha deut eo da vezañ den. Staget eo bet evidomp ouzh ar Groaz, bourreviet dindan Pons Pilat, ha laket en ur bez. Dasorc'het eo d'an trede deiz, hervez diougan ar Skriturioù. Pignet eo d'an Neñvoù, hag emañ azezet a-zehoù d'an Tad. Hag adarre e teuio gant klod da varn ar re vev hag ar re varo; hag e rouantelezh n'he devo fin ebet. Ni a gred er Spered Santel, Aotrou ha bevaer pep tra: a zeu eus an Tad hag eus ar Mab. Eñ a-unan gant an Tad hag ar Mab a vez azeulet ha kec'helet; eñ en deus komzet dre ar Brofeted. Ni a gred en Iliz unan, santel, katolik hag abostolek. Ni a anav ur vadeziant evit pardon ar pec'hedoù. Gortoz a reomp dasorc'hidigezh ar re varo. Ha buhez an amzer-vezh da zont. Amen.

AR C'HINNIG (OFERTOUER)

G/ Ra vo Doue ganeoc'h. R/ Ha gant hoc'h ene.

Pedomp.

Lennet e vez emañ ar C'han-kinnig

Pedennoù a vouezh izel war ar profoù:

Degemerit, Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, ar brofadenn-mañ pur ha glan, a ginnigan deoc'h-ch'wi, va Doue bev ha gwirion, me ho servijer dizellid, evit va fec'hedoù, va fazioù ha va mankoù diniver; hag evit ar re holl a zo endro din; evit an holl gristenion bev ha maro, ma vo evidon hag evito ur vammenn a silvidigezh evit ar vuhez peurbadel. Amen.

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus krouet burzhudus natur an den er penn-kentañ, hag en un doare burzhudusoc'h c'hoazh adsavet anezhañ, roit dimp dre vister an dour hag ar gwin-mañ, ma kavimp perzh en Doueelezh an Hini en deus teurvezet kemer hon Denelezh, Jezuz Krist, ho Mab, hag hon Aotrou, a vev hag a ren, Doue ganeoc'h en unander ar Spered Glan, a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Kinnig a reomp deoc'h, Aotrou, ar c'halir-mañ a silvidigezh, hag e pedomp ho madelezh ma savo gant c'hwezh-vat dirak dremm ho Meurded, evit hor silvidigezh hag hini an hollved. Amen.

Izelek a galon ha glac'haret a ene, ra vimp degemeret ganeoc'h, Aotrou, ha ra zeuio hor sakrifis da vezañ hizio dirazoc'h, a-seurt ma plijo deoc'h, Aotrou Doue.

Deuit, santelaer hollc'halloudek, Doue peurbadel, ha bennigit ar sakrifis-mañ aozet 'vit enor hoc'h ano santel.

Ezañsador ar profadoù en oferenn-lid

Dre bedenn Sant Mikael Arc'hael en em zalc'h a-zehoù da Aoter an ezañs, ha dre bedenn e holl zibabidi, ra blijo gant an Aotrou bennigañ an ezañs-mañ hag hen degemer evel ur frond a c'hwezh-vat. Dre Jezuz-Krist hon Aotrou. Amen.

Ra savo davedoc'h, Aotrou, an ezañs-mañ benniget ganeoc'h, ha ra ziskenno warnomp ho trugarez.

Salm 140, 2-4

Aotrou, ra savo davedoc'h va fedenn 'vel un ezañs :
Gorreidigezh va daouarn evel aberzh an abardaez.
Lakit, Aotrou, ur gward ouzh va genoù,
Ur geder ouzh dor va diweuz.
Na zouguit ket va c'halon da zrougeber,
Da wallembreger torfedoù.

Ra enaouo ennomp an Aotrou tan e garantez ha flamm ar c'han peurbadel. Amen.

Gwelc'hidigezh an daouarn : Salm 25, 6-12

En dinamded e welc'han va daouarn
Hag e ran an dro d'hoc'h aoter, Aotrou !
Evit embann a vouezh uhel ho meuleudi
Ha dezrevellañ hoc'h holl vuzhudoù.
Aotrou, me 'gar annez ho ti,
Al lec'h a zo chomadur ho klod.
Na zilamit ket va ene gant hini ar bec'herien
Na va buhez gant hini an dud a wad,
Ar re a zo karget o daouarn a dorfedoù
Hag a vergn roadoù war o zu dehoù.
Me avat em eus kerzhet en dinamded,
Va dieubit, Aotrou, hag ho pet truez ouzhin.
Va zroad a chom war an hent eeun,
E bodadeg e bobl e vennigin an Aotrou !
Klod d'an Tad, ha d'ar Mab, ha d'ar Spered Santel :
Evel ma oa er penn kentañ, ha bremañ, ha da viken, a gantvedoù
da gantvedoù. Amen.

Degemerit, Treinded Santel, ar brofadenn-mañ a ginnigomp deoc'h evit eñvoriñ Pasion, Dasorc'hidigezh ha Pignidigezh Jezuz Krist, hon Aotrou, hag evit enoriñ santez Vari bepred Gwerc'hez, Sant Yann Vadezour, an ebestel santel Pêr ha Paol, ar re a zo amañ o relegoù, hag an holl Sent. Hi da zegaso enor dezho ha dimp-ni silvidigezh, ha ra bedo evidomp en neñvoù ar re a reomp amañ war an douar an eñvoradur anezho. Ni ho ped dre an hevelep Jezuz Krist hon Aotrou. Amen.

An Orate fratres hag ar genbedenn war ar profadoù

Pedit, va breudeur, ma teuio va sakrifiks-me a zo ivez hoc'h hini, da vezañ kavet mat gant Doue an Tad hollc'halloudek.

R/ An Aotrou da zegemero diwar da zaouarn ar sakrifiks-mañ evit meuleudigezh ha klod e ano, evit hor silvidigezh hag hini an Iliz santel a-bezh.

AR GRASOU

PEDENN VEUR AR SAKRIDIGEZH

G/ Ra vo Doue ganeoc'h. R/ Ha gant hoc'h ene.

G/ Savomp uhel hor c'halonoù. R/ Troet int war-du an Aotrou.

G/ Rentomp grasoù d'an Aotrou hon Doue. R/ Reizh ha dellezek eo.

Ya, tra reizh ha dellezek, dleet mat ha salvus eo dimp bepred hag e pep lec'h rentañ grasoù deoc'h, Aotrou, Tad santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadel, dre ar C'hrist hon Aotrou.

Drezañ e veul an Aeled ho Meurded, ec'h azeul ac'hanoc'h ar Mes-troniezhioù, e stou dirazoc'h ar Galloudoù. Drezañ an Neñvoù ha Nerzhioù an neñvoù, gant ar Serafined gwenvidik, ho lid hag ho kan o tridal a-gevret. Ha gant o youc'hadeg, ni ho ped, hon lezit da unaniñ hor mouezhioù da embann a galon izelek ho meuleudi :

Santel, santel, santel an Aotrou, Doue an Aeled. Leun eo an neñv hag an douar gant ho meuleudi : Hozanna war an uhel ! Benniget an Hini a zeu en ano Doue : Hozanna war an uhel !

Tad leun a vadelezh, ho pediñ a reomp a greiz kalon, dre Jezuz Krist ho mab hag hon Aotrou, teurvezit degemer ha bennigañ ar roadoù, ar profoù, ar sakrifisoù-mañ glan ha santel.

O c'hinnig a reomp da gentañ evit hoc'h Iliz santel Katolik, ma plijo ganeoc'h reiñ dezhi ar peoc'h, he diwall, he c'henstrollañ hag he ren war dremm an hollved; unanet maz omp gant ho servijer hor Pab A... gant hon Eskob A... ha gant holl gouarnerien feal ar feiz katolik hag abostolek.

Ho pet soñj, Aotrou, eus ho servijerien ha servijerezed A... hag eus ar re holl a zo endro dimp amañ, a anavezit o feiz hag o deoliezh. Kinnig a reomp evito, hag int-i o-unan a ginnig deoc'h ar sakrifis-mañ a veuleudi, evito hag evit o zud, evit daspren o eneoù, evit an disgwall hag ar silvidigezh a esperont. Davedoc'h e lakont o mennadoù da sevel, Doue peurbadel, bev ha gwirion.

Kevreet maz omp gant ar re a eñvoromp gant doujañs, da gentañ holl santel Vari bepred Gwerc'hez, mamm Jezuz Krist, hon Doue hag hon Aotrou, hag ivez hoc'h ebestel venniget hag ho merzherien wenvidik, Pêr ha Paol, Andrev, Jakez, Yann, Tomaz, Jakez, Filip, Bartolome, Mazhev, Simon ha Tadde; Lin, Klet, Klemens, Sist, Korneli, Kiprian, Lorañs, Krizogon, Yann ha Paol, Kosm ha Damian, hag hoc'h holl sent: teurvezit en abeg d'o meritoù ha db fedenoù hor gwareziñ e pep degouezh hag hor c'hennerzhañ gant ho sikour. Ni ho ped dre an hevelep Jezuz Krist hon Aotrou. Amen.

Sed eta ar brofadenn a ginnigomp deoc'h, ni ho servijerien ha gannimp ho tiegezh a-bezh: plijet ganeoc'h, Aotrou, he degemer gant madelezh, lakit en ho peoc'h hon devezhioù war an douar, teurvezit hon diwall diouzh an daonedigezh peurbadel hag hor c'hontañ en niver ho tibabidi. Ni ho ped dre Jezuz Krist hon Aotrou. Amen.

Ar brofadenn-mañ, teurvezit, e pep doare, o Doue, + he bennigañ, + he degemer, + he gwiriekat, he lakaat da vezañ speredel ha plijus deoc'h, ma teuio evidomp ivez da vezañ graet + korf ha + gwad ho Mab karet-meurbet, Jezuz Krist, hon Aotrou.

Hemañ, en derc'hent e Basion, a gemeras bara en e zaouarn santel ha kec'helus, hag o vezañ savet e zaoulagad war-du an neñv, etrezek ennoc'h, o Doue, e dad hollc'halloudek, en ur rentañ grasoù deoc'h,

e vennigas ar bara, e rannas hag e roas anezhañ d'e ziskibion, o lavarout : Kemerit holl ha debrit dioutañ, rak kement-mañ eo va c'horf.

Hag en hevelep doare, war lerc'h ar goan, e kemeras ar c'halir priziuz-mañ, en e zaouarn santel ha kec'helus, hag adarre en ur rentañ grasoù deoc'h e vennigas anezhañ, hag e roas anezhañ d'e ziskibion o lavarout : Kemerit holl hag evit dioutañ, rak kement-mañ eo kalir va gwad, gwad ar Gevredadurezh nevez ha peurbadel, - ar Mister a feiz -, a vo skuilhet evidoc'h hag evit engroez an dud, evit pardon ar pec'hedoù . Kement gwech ma reot an dra-mañ e vo an eñvoradur ac'hanon.

Setu perak, Aotrou, ni ho servijerien ha ganimp ho pobl santel, o terc'hel soñj eus Pasion evurus ar C'hrist, ho Mab, hon Aotrou, eus e Adsavidigezh eus a douez ar re varo, hag ivez eus e Bignidigezh klodus d'an Neñvoù, e kinnigomp d'ho Meurded leun a splannder, - eus a douez ar madoù hoc'h eus roet dimp -, al Lazhiad peurvad, al Lazhiad santel, al Lazhiad dinamm, bara sakr ar vuhez peurbadel ha kalir ar silvidigezh hollbadus.

Ouzh ar profou-mañ teurvezit sellout gant madelezh ha karantez, hag o degemer, evel m'eo bet plijot deoc'h degemer donezonoù ho servijer Abel an den Just, sakrifis Abrac'ham, hon unheldad, hag an hini a ginnigas deoc'h ho peleg bras, Melc'hisedek, profadenn santel, sakrifis dinamm.

A galon izelek, hoc'h aspedomp, Doue hollc'halloudek, grit ma vo douget ar brofadenn-mañ dre zaouarn hoc'h Ael santel, war hoc'h aoter en Neñvoù, dindan sell ho Meurded-Doue ; ma vo ganeoc'h roet dimp-ni, pa gemerimp hor perzh eus an aoter-mañ dre gomuniañ da Gorf ha da Wad santel-meurbet ho Mab, bezañ karget eus an neñv gant ho Pennozh hag ho Kras. Dre Jezuz Krist hon Aotrou. Amen.

Ho pet soñj ivez, Aotrou, eus ho servijerien ha servijerezed A... hag A... a zo aet kuit en hor raok, merket gant siell ar feiz, hag a zo gourvezet en ur c'housed a beoc'h.

D'ar re-se, Aotrou, ha d'ar re holl a renoz er C'hrist, gratait, ni ho ped, lec'h-annez an eurvad, ar sklerijenn hag ar peoc'h. Dre Jezuz Krist hon Aotrou. Amen.

Ha dimp ivez, ho servijerien, evidomp da vezañ pec'herien, p'hon eus fiziañs en ho trugarez divent, teurvezit reiñ ul lec'h en kenseurtiezh hoc'h ebestel ha merzherien santel, Yann, Stefan, Mazheas, Barnaba, Ignas, Aleksandr, Marsellin, Pêr, Felisitas, Perpetua, Agata, Lusie, Agnes, Sesilia, Anastasia, hag hoc'h holl sent. En o c'hevredigezh teurvezit hor resev, n'eo ket en abeg da dalvoudegezh hon oberoù, met en abeg da largentez ho pardon. Dre Jezuz Krist hon Aotrou.

Drezañ, Aotrou, ne baouezit ket da grouiñ ar madoù-mañ, d'o santelaat, d'o bevaat, d'o bennigañ ha d'o reiñ dimp da zonezon.

Drezañ ha gantañ hag ennañ e vez rentet deoc'h-c'hwi, Doue Tad hollc'halloudek, en unander ar Spered Santel, pep enor ha pep klod, e gantvedoù da gantvedoù.

A/ Amen.

AR GOMUNION

Pedomp :

Sklerijennet gant gourc'hemenn ar Salver ha stummet gant kelennadurezh un Doue, e kredomp lavarout :

Hon Tad hag a zo en neñv, hoc'h ano bezet santelaet; ho rouantelezh deuet dimp; ho polontez bezet graet war an douar evel en neñv. Roit dimp hizio hor bara pemdeziek, pardonit dimp hor pec'hedoù evel ma pardonomp d'ar re o deus pec'het ouzhimp. Ha n'hon lezit ket da gouezhañ en tentadur.

R/ Met hon dieubit eus an droug.

Amen.

Hon dieubit, Aotrou, eus an holl drougoù tremenet, a-vremañ ha da-zonet, ha dre bedenn gwenvidik ha klodus santez Vari, mamm Doue, bepred Gwerc'hez, dre bedenn hoc'h ebestel gwenvidik Pêr ha Paol hag Andreu hag hoc'h holl sent, plijet ganeoc'h reiñ dimp ar peoc'h en hon deizioù, hag ober ma vimp gant harp ho trugarez, dieubet bepred eus ar pec'hed ha diwallet diouzh pep trubuilh. Ni ho ped dre Jezuz Krist ho Mab hag hon Aotrou, a vev hag a ren Doue ganeoc'h en unander ar Spered Glan, a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Peoc'h an Aotrou - da vezo bepred - ganeoc'h-c'hwi.

R/ Ha gant hoc'h ene.

Ar c'hemmesk hag ar sakridigezh-mañ eus korf ha gwad hon Aotrou Jezuz Krist da dalvezo dimp dre ar gomunion, evit ar vuhez peurbadel. Amen.

Dañvadig Doue, a lam kuit pec'hedoù ar bed, ho pet truez ouzhimp.

Dañvadig Doue, a lam kuit pec'hedoù ar bed, ho pet truez ouzhimp.

Dañvadig Doue, a lam kuit pec'hedoù ar bed, roit dimp ho peoc'h.

Aotrou Jezuz Krist, c'hwi hag hoc'h eus lavaret d'hoc'h ebestel : Ar peoc'h a lezan deoc'h, va feoc'h a roan deoc'h ; na sellit ket ouzh va fec'hedoù met ouzh feiz hoc'h Iliz; ha plijet ganeoc'h reiñ dezhi ar peoc'h hag an unvaniezh a c'houlennit, c'hwi a vev hag a ren, Doue a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Aotrou Jezuz Krist, mab an Doue bev, c'hwi hag hoc'h eus gant ho maro degaset ar vuhez d'ar bed hervez bolontez an Tad gant kenober ar Spered Glan, va dieubit dre ho korf hag ho kwad sakr ha santel-mañ, eus kement a zo fall ennon hag eus pep drougiezh; grit ma talc'hin bepred d'ho kourc'hemenoù, ha n'am lezit ket d'en em zistagañ diouzhoc'h-c'hwi a vev hag a ren Doue gant an Tad hag ar Spered Glan a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Ho korf santel, Aotrou Jezuz Krist, emañ o vont da zegemer, daoust maz on hep dellid, grit na vo ket evidon un abeg a varn hag a gondaonidigezh; met en ho trugarez, roit din ma talvezo evit diwallerezh va c'horf ha va ene hag evel remed a silvidigezh, C'hwi a vev hag a ren Doue gant an Tad en unander ar Spered Glan a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Kemer a rin bara an neñv hag e pedin ano an Aotrou.

Aotrou, n'on ket dellezek ez antrefec'h em zi, met lavarit ur ger hepken, hag e vo pareet va ene. (Teir gwech)

Korf hon Aotrou Jezuz Krist da viro va ene evit ar vuhez peurbadel. Amen.

Ar Bedenn evit ar Vro. Follenn 45

Petra rentin d'an Aotrou evit kement en deus roet din ? Sevel a rin ar c'halir a silvidigezh en ur bediñ ano an Aotrou. An Aotrou a bedin kanmeulus e ano, ha distrobet e vin diouzh va enebourien.

Gwad hon Aotrou Jezuz Krist da viro va ene evit ar vuhez peurbadel. Amen.

Hon lakit, Aotrou, da zegemer e purentez hon ene, frouezh ar sakramant hon eus debret, ra zeuio an donezon-mañ resevet ganimp en amzervezh dibad, da vezañ dimp ur remed evit ar vuhez peurbad.

Ho korf am eus kemeret, Aotrou, hag ho kwad am eus evet, ra'n em stagint ouzh va c'halon, na vese ken ennon netra eus saotradur va fec'hedoù, goude bezañ bet adnevezet gant purentez ha santelezh ho misterioù. C'hwi a vev hag a ren a gantvedoù da gantvedoù. Amen.

Ra vo Doue ganeoc'h. R/ Ha gant hoc'h ene.

It bremañ, kaset eo bet. R/ Bennozh da Zoue !

Degemerit, Treinded santel, doujañs ho servijerien ; hag ar sakrifis am eus kinniget d'ho Meurded, evidon da vezañ dizellid, grit ma plijo deoc'h en ho truez ha ma tegaso warnon ha war ar re am eus profet evito, grasoù digant ho madelezh. Ni ho ped dre Jezuz Krist hon aotrou. Amen.

An Doue hollc'halloudek d'ho pennigo, an Tad, ar Mab, hag ar Spered Santel. R/ Amen.

Ra vo Doue ganeoc'h. R/ Ha gant hoc'h ene.

Penn-kentañ an Aviel santel hervez Yann. R/ Klod deoc'h-c'hwi, Aotrou.

Er penn kentañ edo ar Verb hag ar Verb a oa ouzh Doue hag ar Verb a oa Doue. Er penn kentañ edo ouzh Doue. Drezañ eo bet graet pep tra, hag heptañ n'eus bet graet netra eus a gement a zo bet graet. Ennañ edo ar vuhez, hag ar vuhez a oa sklerijenn an dud. Hag ar sklerijenn a luc'h en deñvalijenn hag an deñvalijenn n'he deus ket he dalc'het. Bez'e voe un den degaset a-berzh Doue, Yann e ano. Hemañ a zeuas evit reiñ testiñ, evit bezañ test d'ar sklerijenn, evit ma kredje an holl drezañ. N'eo ket eñ a oa ar sklerijenn, met eñ a zeue evit reiñ testiñ d'ar Sklerijenn. Ar Sklerijenn, an hini wirion hag a sklaera pep den, a oa o tont er bed. Er bed edo, ha drezañ eo bet graet ar bed, met ar bed n'en deus ket e anavezet. Deuet eo en e dra, hag e re n'o deus ket e zegemeret. Met da gement hini en deus e zegemeret, en deus roet ar galloud da vezañ bugel da Zoue, d'an neb a gred en e ano ha n'eo ket bet ganet eus ar gwad, nag eus youl ar c'hig, nag eus youl an den, met eus Doue. Hag ar Verb a zo deuet da vezañ korf ha bet eo o chom en hon touez ha gwelet hon eus e c'hloar, evel gloar Mab unel an Tad, leun a c'hras hag a wirionez.

R/ Bennozh da Zoue !

AR PEDENNOU GOUDE AN OFERENN

Me ho salud, Mari, leun a c'hras, an Aotrou Doue 'zo ganeoc'h; benniget oc'h dreist an holl wragez ha benniget frouezh ho korf, Jezuz. Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidomp, pec'herien, bremañ hag en eur eus hor maro. Amen. (Teir gwech)

Salud, Rouanez, o Mari, mamm a druez; buhez ha douster hag esper hor c'haezhnezh ! Etrezek ennoc'h e kriomp e kreiz hon arvar. Klevit hon huanad pa c'harmomp en daeroù eus an draonienn-mañ a c'hlac'har. Troit eta war-du hon dienezh, kened dispar ho taoulagad trugarezus, hon advokadez. Ha Jezuz, ho mab santel, frouezh ho korf benniget, e ziskouezit dimp en neñvoù, er vuhez. Mamm ken dous, o ken mat, o mamm ar joa, Itron Varia.

G/Pedit evidomp, mamm santel da Zoue !

R/Ma vezimp dellezek eus promesaoù Jezuz.

Pedomp.

Aotrou Doue, hor repu hag hon nerzh, sellit ouzh ho pobl pa gri war-du ennoc'h, hag en abeg da bedenn ar Werc'hez klodus Vari, mamm dinamm Doue, da bedenn sant Jozeb he fried, d'an ebestel Pêr ha Paol ha d'an holl Sent, selaouit gant truez ha nadelezh ar goulennoù a reomp evit distro ar bec'herien, evit frankiz hag emzav hor mamm santel an Iliz, dre Jezuz Krist hon Aotrou. Amen.

Sant Mikael arc'hael, hon difennit en emgann, bezit hor gwarezer a-enep drougiezh hag itrikoù an diaoul. Doue da enebo outañ, hen aspediñ a reomp, ha c'hwi penn-brezel armeoù an neñv, argasit en Ifern gant nerzh an Aotrou, Satan hag an holl drouksperedoù o kantren er bed evit koll an eneoù. Amen.

Jezuz, santel-meurbet ho kalon. R/ Ho pet truez ouzhimp.
(teir gwech).

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

DISKLERIADURIOU BERR

EVIT UN OFERENN DISPLEGET 000

Asperjez : An dour benniget strinket warnomp a zegas soñj dimp eus hor badeziant, evit hon treiñ d'en em welc'hiñ a-nevez e gras ar sakramant kentañ-se. Dre maz omp tud badezet eo hon eus an droet hag an dever da gemer perzh en oferenn.

Araok an oferenn : Hirie e lidomp oferenn ar ...

Mister ar Verb eo Jezuz ganet en hon touez hag o vevañ ganimp, eo Jezuz o vervel, oc'h adsevel eus a douez ar re varo hag o pi-gnat d'an Neñv, eo mister e zonedigezh evit sachañ war e lerc'h ar bed a-bezh war-du e Dad.

Buhez ar c'hristen a zo ivez ur Pask, un tremen. Hervez ma vezomp unanet gant Jezuz e vezomp sachet gantañ da heul nerzh e lañs, unanet outañ evit sevel war-du an Tad a zo en Neñv.

Kenbedenn : En em lakit war sav, mar plij, evit ar bedenn ez a ar beleg da ziskleriañ en ano an holl, evit goulenn warnomp holl ar c'hras da vezañ gwelloc'h kristenion.

Ar Bedenn evit ar Vro. Follenn 46

Abostol : Azezit. Selaouit komzoù Doue gant ar pennad tennet eus ...

Aviel : En em lakit war sav, mar plij, evit selaou embannidigezh komz Doue e-barzh Aviel sant ..., pennad ...

Kredo : Ar Gredo eo respont hor feiz kristen da Geloù mat ar silvidigezh, a vez diskleriet bremañ dimp ivez.

Ofertouer : An Ofertouer eo lodenn gentañ Mister ar Sakrifis lidet e Sakramant an Aoter.

A Aotrou Doue ! Profañ a reomp deoc'h, holl asamblez, gant ar beleg, ar bara hag ar gwin, a vo sakret e korf hag e gwad ar C'hrist. Profañ a reomp deoc'h war un dro hor c'halonoù hag hor buhezioù, ma teuint int ivez da vezañ chenchet ha santel er C'hrist.

Pedenn war ar prof : Degemerit, Aotrou, pedennoù ha profadenn ho pobl bodet amañ endro d'an aoter, ma talvezo dimp an oferenn santel-mañ da dremen da c'hloar an neñvoù.

Prefas : Gant ar Prefas ec'h antreomp en eil lodenn eus Mister ar Sakrifis : lodenn ar sakridigezh, lec'h ma vo rentet grasoù da Zoue an Tad, ha profet dezhañ e Vab santel evit silvidigezh ar bed.

Bezit eta war evezh mat, o teurel pled, ha chomomp unanet start ouzh ar beleg e kement ez a da lavarout ha d'ober ouzh an aoter.

En em lakit war sav, mar plij.

Memento : Pedomp evit an Iliz a-bezh, evidomp hon-unan, hag en un doare ispisial evit (mennadoù an deiz)...

Goude ar Gonsekrasion : O Doue, Tad mat-meurbet, evit ho kloar hag evit hor silvidigezh, e kinnigomp deoc'h korf ha gwad ho Mab, Jezuz Krist hon Aotrou, sakrifiet war ar Groaz, adsavet eus a douez ar re varo, pignet e gloar an Neñvoù, hag eñ en gwirionez war an aoter-mañ dindan sin ar bara hag ar gwin bet sakret.

Teurvezit, o Doue, degemer a galon vat, an ostiv-mañ santel ha parfet-meurbet a brofomp deoc'h a galon.

Hag en distro, meurvezit ivez, eus lein an neñv, reiñ dimp-ni holl leunder ho Pennozh hag ho Kras.

Memento ar re varo : Pedomp evit hon anaon, dreist-holl evit ...

Araok ar Batez : Gant ar Batez ec'h antreomp en trede ha diwezhañ lodenn eus Mister ar Sakrifis : lodenn ar Gomunion.

Holl hep mank dalc'homp hor c'halonoù digor mat, evit ma tiskennno ennomp gras ar Sakramant, a zo ur c'hras a silvidigezh, a vuhez, a Resureksion.

Araok ar Bedenn goude komunian : En em lakit war sav evit ar bedenn glozañ, a ya ar beleg da ziskleriañ bremañ, evit goulenn ma c'hellimp dre nerzh an oferenn-mañ bevañ e gras hag e mignoniezh Doue.

oooooooooooooooooooo

Abbé Henri Poisson : Une lumière de l'ordre des Frères Prêcheurs YVES MAHYEUC, 1462-1541, évêque de Rennes de 1506 à 1541. 180 pajenn. skeudennaouet. E gwerzh e ti an oberour, 16, rue Saint Louis, Rennes.

Peurliesañ ne gavan ket kalz plijadur o lenn levrioù biografiezh, o vezañ m'en em goll ar skrivagner, ken aes ha tra, e munudoù a seblant din bezañ didalvoud. Amañ avat n'helle ket an oberour chom gant kaozioù a netra, rak gant an amzer ampellet eo bet diverket meur a linenn eus buhez Erwan Mahyeuc. N'hon eus ken dirazomp nemet ar pep pennañ. Met arpep pennañ-se end-eeun a zo a dalvoudegezh vras ha dedennus da lenn penn da benn.

Rak setu amañ un den a zo bet tad-koñfesour Anna Breizh, er bloavezhioù I49I-92, a zo ken pouezus en istor hor bro. Ha goude-se pa zeuio da vezañ eskob Roazhon, e vo e-pad pemp bloaz ha tregont, e kêr benn an Dugelezh, emellet muioc'h pe nebeutoc'h en aferioù an amzer.

Gant kalz a ampartiz e oar an aotrou Poisson taolennañ bev dirak hon daoulagad, an amzer drubuilhus-se, lec'h ma seblante pep tra en em zispenn, ken war dachenn ar politikerezh, ken war dachenn ar relijion. Hag un den a Zoue o stourm kalonek da adreizhañ pep tra, da saveteiñ pezh a c'helle bezañ saveteet.

Gant ar c'hementad a sklaeridigezhioù dastumet en-dro d'ar marevezh-se eus hor bro, n'helle den studiañ da vat istor Anna Breizh, hep lenn gant aked' al levr-mañ. Met kaeroc'h a zo, gant an oberenn-mañ en deus an aotrou Poisson difraostet ul lodenn eus ul labour bras a chom d'ober : istor relijiel hor bro. Er soñj-se em bije karet gwelout an oberour o vont larkoc'h a-wechoù gant e zisplegadurioù, er pennad IO da skouer, diwar-benn istor an devosionoù d'ar c'houlz-se, ha kement a c'hellomp gouzout gant ar misalioù hag ar brevalioù deuet betek ennomp eus lidadurezh ar pemzekvet kantved.

Hetomp ma vo taolet, ar drugarez d'al levr-mañ, muioc'h a bled ouzh santelezh Erwan Mahyeuc, a dlefe bezañ enskrivet war roll ar re evurus, mar ne vije ket diseblanted eskibien gall ar I7-vet kantved e Roazhon.

M.G.

PER TOULHOAT

Hep mar ebet ez eo Pêr Toulhoat unan eus hon arzourien vreizhat gwellañ e rummad ar re yaouank. Ken ha ken ampart ez eo war labourioù a bep seurt : gwerlivour a vicher ez eo barrek ivez da dresañ ur banniel-prosesion evel hini Lokronan, pe da sevel prierezh. E stumm levezonet gant an arzh a vremañ a zo koulskoude deveret war eeun eus arzh hor C'halvarioù, eus an ornadurezh poblek. Fellout a ra dezhañ bezañ breton. Setu perak ne blij ket bepred da veleien 'zo eskopti Kemper, dedennet gant an etrevroadelezh. Daoust ma plij kenañ da reoù all. Gant gwir abeg.

E Hent ar Groaz evit Chapel Ospital ar Verdeadurezh e Brest a zo un oberenn uhel meurbet e pep keñver. Ha n'eo ket souezhus e vefe meulet dichipot gant niv. 2, 1957, ar gelc'hkelaouenn Art d'Eglise, embannet gant Beneadiz Abati Sant Andrev, Brugge, Belgia. E kichen un arz divinadellus, setu amañ da vihanañ un arzour en deus resped ar mister, skiant ar gwir relijion. " Voilà, en un mot, eme Dom Samuel Stehman, un art sacré sans équivoque, sans duperie, et sans discussion ". Kendalc'hit, Toulhoat, hep tromplerezh, hep touelle-rezh, hep diskenn da heuliañ froudennoù dibad hon amzer.

HON ANAON : Pedomp an Aotrou evit Jord ar Mée, maro e Roazhon d'an 2 a viz gwengolo. Breizhad kalonek, eo eñ a voule aketus levrioù ar Bibl liesskrivet. An Aotrou da vezo trugarezus outañ.